



# Gouel al Levrioù e Karaez

Da vare an impalaeriezh e kase an holl hentoù da Roma. D'ar 26 ha 27 a viz Here 2013 e kaso hentoù Breizh da Garaez evit Gouel al Levrioù. Europa eo tem er bloaz-mañ. Un digarez e vo evit diskouez ez eo Europa un ti hag a vod pobloù disheñvel gant ur sevenadur boutin. Skrivañ a rae Jean Monnet, diazeour Unaniezh Europa, ne oa ket "an arnevezadur ur stad eus an traoù met ur stad-spered". Dre al levrioù, dre engouestl ar geodedourien hag ar stourmerien e vo kreñvaet diorren ar rakres europat.

**A**r re a zo tik gant al levrioù a c'hello pourmen en alezioù ar saloñs ha gwelet an nevezentioù. E-touez an tiez-embann niverus war al lec'h ez eus unan a vo oberiant-tre e-pad an daou zevezh. Lidañ a raio izili Al Liamm 400<sup>vet</sup> niverenn ar gelaouenn lennegel. E-sell emaint da aozañ divizoù diwar-benn istor an avantur ha reiñ ar gaoz d'al lennerien. Skignet e vo ivez ur film savet gant Per-Jakez Helias ha gouestlet da vuhez Ronan Huon, unan eus pennaouerien Al Liamm.

## 400<sup>VET</sup> NIVERENN AL LIAMM

Ober a ra berzh ar gelaouenn rak reiñ a ra kalz plas d'ar rummadoù nevez o deus c'hoant da rannañ gant ar vrezhonegerien all o danevelloù, barzhonegoù, skridoù beaj, studi, dezrevelliñ. Evito ez eus bet aozet ur genstrivadeg danevelloù gant un dodenn arouezius : ar sifr 400. Kinniget e vo an danevelloù dibabet gant ar juri d'ar Sadorn.

Estreget ur romant savet gant André Gide ez eo Les nourritures terrestres. Atav e vez ur pred rannet etre mignoned ur prantad plijus. Lod anezho zo o chom pell diouzh Breizh. Ober a ra ar re yaouank anaoudegezh gant ar re varv dre gomzoù ar re henañ. Dre an divizoù-se e vez kreñvaet pal ar gelaouenn : bezañ ul liamm etre ar vrezhonegerien evit magañ o freder ha lakaat anezho da vezañ emren evit govellañ o-unan o sell war ar bed.

Redek a reer dre ar vro bep daou vloaz a-drugarez da aozerien Ar Redadeg. Trugarez dezho ! E Karaez e vo kinniget ur maraton disheñvel. Ret e vo lenn ul levr e-pad div eurvezh hep ehan. Ar pajennoù a ray evit bazh-eilañ. Teir munutenn lenn pep hini.

## EN EUROPA


Tem Gouel al Levrioù eo Europa. Brav-tre eo ar skritell. Pep balafenn a zoug livioù ur vro. Nijal a reont pell diouzh douetañs ar geodedourien a sell ouzh an Unaniezh evel mammenn o c'hudennoù. Amañ ez eus ur glaoustre. Penaos lakaat an dud da cheñch o barnadenn griz ? Niverus eo an tachennoù e-lec'h ma c'hellfe bezañ ar c'hevread ur sikour. Gellout a reer menegiñ peurwiriekaat karta ar yezhoù, adunaniñ Breizh, ar gwir d'ar pobloù d'emdidermernañ. Talvoudus eo degas spered Europa e-kreiz ar gaoz.

Alies e vez lavaret ez eo ar yaouankiz dazont ur vro hag alies e vez disoñjet goulenn o ali outo peogwir ne c'hellont ket votiñ. Divizet o deus renerien Saloñs al Levrioù aozañ ur genstrivadeg danevelloù evit reiñ ar gaoz dezho. "Bro Karaez, Breizh hag Europa" eo an tem. Ur redi zo. Troet e vo en ur yezh all eus Europa.

## DONOSTIA E KARAEZ

Diwanañ a ra an diaesterioù pa ya an eskemmoù etre an dud war dreutaat. Evit mont a-enep an emdroadur-se he deus roet lañs Viviane Reding, besprezidantez Europa, da "Bloavezh europat ar geodedourien". Kemer a ra perzh Saloñs al Levrioù en taol intrudu-se. Gellout a raio ar Vretoned degas o freder dezho peogwir e ouzont a-viskoazh n'eo ket ar mor un harz met ul liamm etre ar pobloù. N'eus nemet pleg-mor Gaskogn da dreuziñ evit saludiñ kêr Donostia a zo "prezidantez" a-enor ar festival. Bretoned hag Euskariz, dorn-hadorn, troet o selloù war-zu ar mor hag Europa.

Tangi Legavre



Golo niv.400 Al Liamm



Skritell Gouel al Levrioù e Karaez.

**Saloñs al Levrioù, d'ar Sadorn 26 ha Sul 27 a viz Here, e Karaez.**

Evit gouzout hiroc'h : <http://festivaldulivre-carhaix.org>